

KANTIK

ITRON VARIA AR PARKOU

DISKAN.

Klevet euz lein ann Envou
 Mouez al labourerien,
 Itron Varia ar Parkou,
 Mamm ar guir gristenien.

1. E kraouik eul labourer
 Jezuz hoc'h euz ganet :
 Ker Bethleem d'hen diguemer
 N'he devoa lec'h ebet....
2. Hô pried a labourer
 Eveldomp, war ar mez ;
 Ha Jezuz hen zikoure,
 Da c'honit he vuez.
3. Ganthe, war ar mez ive,
 O labourat noz-de,
 Enn eunn ti paour a leve,
 C'houi, Gwerc'hez, a veve.
4. Brema pa n-oc'h Rouanez
 Ann Ælez hag ar Zent,
 Dal ma komzet, ouz ho mouez
 Pep tra er bed a zent.
5. War hon douarou skuillet
 Tomder pe ieinijen,
 Hervez ezom ar c'hreunen
 Enn erv ganimp hadet.

6. Dalc'het dour enn hon prajou
War ar ieot o c'hlazan ;
Pelleit ouz hon zamm madou
Ar gurun hag ann tan.
7. Roet galloud d'hon memproù,
D'hon speret sklerijen,
Gras Doue d'hon eneou,
Bremen ha da viken.
8. D'hon tu ni bromet diwall
Ouz pec'het meventi,
Ouz touaden pe skuer fall,
Kouls er pors vel enn ti.
9. Ni bromet c'hoas 'nem zikour
Evel breuder guirion,
Bezan mad evit ar paour,
Hag evit ann anaon.
10. Ha goude, oll war ann dro,
O Mamm garantezuz,
Enn env ni enem gavo
Bepret guenac'h euruz.

Imprimatur.

Brioci, die 14^a octobris 1891.

M. LE PROVOST, *v. g.*